



CHANSON AR FUMEREZET.

Var ton ar Parlamant.

Digassit din liou ha paper,
Ma laqin en eur vanden
Bremâ souden var va c'hayer
Ar merc'het hac o fiben;
Rac dies bras eo va speret,
O velet qement a verc'het
Pere a zoug en o c'hero'hen
Corn butun ha liassen.

Mes evel ma zeo danjerus
Ur vaouez, pa ves fachet,
E c'houlennàn ouzoc'h excus,
Merc'het, mar bezit choquet;
Rac bezit persuadet mat
Ho pezo bremâ ur flipat
Abalamour d'ho liassen,
D'ho putun ha d'ho piben.

Va c'halon a doun seret
O velet^{er} ar viltançon :

Qement a zo ve sclabezet
 Pa fumont o c'horniadou;
 Ha pa vezont ec'h oza'r yot,
 Na ranq get sur da gaout e lot,
 Rao neuze vezont e trein vat
 Da fumi ur c'horniedat.

Me a vo aris deoc'h, merc'het
 Da ober brinidennou
 Evit laqat var ho pruchet
 E play ho mouchouerou.
 Qementse ne gousto get qer,
 En un devez ur c'hemener
 A rayo meur a vriniden
 Da blem glaouren ar biben.

Goaset, bezit ive difun,
 Da brepari ho liassen,
 Da laqat an tamou butun
 A guetot en ho souben;
 Rac m'en assur pred boued ebet
 Ne vezo deoc'h-u preparet
 Hep en devezo e loden
 Eus ar sustanç ar biben.

Pa zit en un tu da bourmen,
 Me ve get drouc ho quelet
 ● tispaga ho liassen

Da rei d'ho commerezet.
 Va c'hommer, laqit ur e'horniat,
 Ar vech-mâ e meus butun mat;
 Pa vezo ar vlaguen gollo,
 An ozac'h a bourvezo.

Goude fumi, peur liessa
 E clêvan e ve sec'het;
 Neuze n'em leqeont da lonqa
 Dour evel toullou gòet.
 Ne qet soues bras o guelet
 Gant hidropisi decedet:
 Coulz e ve dezo eva the,
 Pe guin-ardant, pe gafe.

Mes ne zeus re qen disqempen
 Evel ar vaguerzet;

Unan a zo eus ar vanden
 E deus dêvet he bruchet.
 Caer vezo deoc'h, bugaliguou
 Mar guellit serri ho qinou,
 Rac anez ho pezo certen
 Lod a sustanç ar biben.

Guelet merc'het a zo esqis
 O fumi ur c'horniedat;
 Coulz eo ganén guelet ur vis
 O neza ur gueyelat.

En donjer eo guelet, o min,
 Ha c'hoas e sonch d'an traou indign,
 Pa ve en o beg ur biben,
 E vezont merc'het qempen.

Goaset, da zit eus ho qêriou,
 Ne vanqit qet da guzet
 Ho putun hac ho pibennou,
 P'otramant e viot flippet;
 Rac pa deuyo dê c'hoant fumi,
 Na chommo corn abet en ty
 Na vezo furlogoteat
 Evit caout ur c'horniedat.

Mar deus, hervez an decrejou,
 Commisseret er vro-mâ,
 Da gonta ar chiminalou,
 O deo labour da chiffra:
 Paqet viot, fumerezet,
 Rac ret eo, herves an decret,
 Paea divar pep chiminal
 Tri scoët ha pêvar real.

Bremâ ive, merc'het yaouanq,
 M'ho laqai er vreuriezh,
 Rac ne veac'h qer sur contant
 Ma n'o pe ho tijenes:
 N'oc'h nemet plac'het divalo,

Dismeganç, fableu, farç ar vro,
 Ha ma na guitait ar butun,
 Sur e collot ho fortun.

Mes ne deus re qen etourdi
 Evel ar fumerezet;
 Qentoc'h eguet chom hep fumi,
 Ezaent da glasq o bouet.

O ziez a vez dislogot,
 Rac n'o deus na bara, na yot;
 A boan vras è dezo so qen
 Gallout golo o c'hroc'hen.

Servichereset, se zo sclêr,
 A ranco mont diarc'hen;
 Ho cajou a vezo dister
 Evit bourra ar vlaguen.

Manific e viot evelse,
 Scânvoc'h e viot da vale;
 Ha pa vezo lous an hentchen
 Na gargot qet ho ponton.

Avoalc'h sur emeus caçotet
 Ar merc'het hac o siben;
 Ma na dint qet convertisset,
 Int goassoc'h eguet payen.
 Rac se me ya da finissa,
 Que'h o lezel var guement-:

Selaouit attantivamant
 Va diveza complimant.


Esper e meus, fumereset,
 Goude ur seurt prezeguen,
 E vezo ho calon touchet
 Hac e reot pinijea.

Laqit urz vad en ho tiez,
 Ha chenchit pelloc'h a vuez,
 Rac mar bezit re obstinet,
 E viot exqumunuguet.

Ac'hanta ta, fumereset,
 Poan oc'h eus en ho calon,
 O velet qer brao qempennet
 Hoc'h histor hac ho chanson!
 Mes qemerit patientet,
 Calz c'hoas a ve da lavaret
 Evit echui pen-da ben
 An histor eus ar biben.

Ar chanson-mâ so composet
 Gant daou ganfart disourci;
 Evit exerci o speret
 O deus great anezi,
 Ne qet dre intantion fall,
 Mes seulamant evit farçal
 Hac evit en em recrei;

Merc'het, deut d'o fardoni.⁷



C H A N S O N

AR PLAC'HIQ PAOUR HA FUR.

Var ton Fantic Coant.

Dreiz mañ d'êc'h, Fantic Coant...

Mes pebes chenchamant!

Diveza m'ho quelis

E voa fresq hoc'h invis;

Mes' abaoùe, me gred,

Noc'h eus-hi qet chenchet.

Joa vras ameus ouzoc'h,

C'hoas em bije muioc'h,

Ma vije ho qenet

Eun nebeut decoret

Eus a uetadurez.....

Pardonit, va mestrez.

Na ellàn qet credi

E ve dre ziegui,

Qen nebeut supposi

E ve dre loustoni

O cuelàn, plac'h yaouanq,

En ho lengeri fanq.
 Anzavit din hep mes
 Doare ho tiegues
 Paourente zo calet,
 Mes n'en deo qet pec'het :
 Lavarit din hep aon
 Ha c'houi a vanq a zaon.

Autrou, e ty va mam
 Na gafet qet un tam,
 Mac arc'hant da brena,
 An dra-se zo goassa;
 Evelse n'en don qet
 Da veza tamallet.

Ne ve caret em zy
 Memet teir scudel pri,
 Teir loa goad, ur bodez,
 Ur podic da glasq lèz,
 Diou scadn, un tabore,
 Ur banq hac ur guele.

Cavet e ve ouspen
 Un tamic chaoudouren;
 Ur gos cramaileren,
 Trebez, pillic, pladen,
 Evit oza crampoiez,
 Mes nonpas alies.

C'hoas ur c'hribinou mad,
 Pa ve lin da gribat,
 Daou gar evit neza,
 Travouill da zibuna,
 Tamouez da oza'r bleud,
 Pa vez guerzet an neud.

N'hon deus qet pemp guenzaec.
 Da gaout un tam blonec,
 Nac un dornad olen
 Da zalla ar zouben,
 Hac evit ober tan
 Hon eus ur garguic lann.

Cetu aze, autrou,
 Invantor va güirion.
 Ne neus qet er c'hontre
 Ur plac'h qer paour ha me;
 Mar clasqit ar madou,
 Chenchit tu d'ho pajou.

Var guementse, Fantic,
 N'en doc'h qet pinvidic?
 Mes ho comzou güirion
 A ravis va c'halon :
 Seulvi ma ho clêvàn,
 Seulvuic'h ho caràn.

Me zo ur marc'hadour

Dre zouar ha dre zour;
 Me meus aour hac arc'hant,
 Ha demeuranç charmant,
 Gant sourci vras meublet,
 D'ho receo, pa guerfet.

Tri pe bêvar bloas so
 E valeàn dre'r vro
 Evit clasq ur pried,
 Ha n'em eus qet cavet
 Ini d'am zantimant,
 Nemedoc'h, plac'h prudent.

Lavarit din eta
 Ha me a dle conta
 Da gaout ar blijadur,
 Dre voneur dreist natur,
 D'ho quelet oc'h orni
 Dre ho qenet va zy?

Mar bez contant va mam,
 Me na zifferin tam.
 Dre vemes carante
 Deomp hon daou he bete;
 Va c'halon zo mantret
 Mar bec'h discouviet.

Deis mad, greg enorus,
 Mam vad, fur hac eurus;

Mam d'eur verc'h enorabl,
 Caer, modest, agreabl,
 Am bo evit pried,
 Ma n'am refuset qet.

Birviqen ae gredan
 Autrou, vec'h deut amma
 Evit ober goulen
 Demeus eur vergerea
 A bep tra dibourve,
 Sepet a burete.

Sellit e pes castel
 E chom an demezel;
 Guelit e peb costez
 Ar brassa paourentez
 Evit ho tistrei
 Deus an nep fantazi.

Mam, eus ho tieguez
 Em eus anaondeguez;
 Var guementae levomp,
 Hon tri en em glevomp
 Da veva en hon èz
 Dre va finvidiguez.

Autrou, ne dleàn qet
 Refusi ho reget,
 Dre ho tisinteres

Er choas eus ur vestrez,
 E zoun sur e rentfet
 Euruz va merc'h caret,

Dre o friedelez

Eurus voent assambles;

Douçter ha yaouanqis,

Modesti ha coantis

A zo guell avichou

Eguet an oll vadou.

CONCLUSION.

Dre'r zon-mâ e veler,

Var ar mèz hac en qêr,

E zeo ar barfetet

A blich mui d'ar voaset,

Rac-se, merc'het ar vro,

Bezit modest ato,

Hac e cavot pried,

Evel mo teziret.

F I N.

E Montroulez, e ti LÉDAN.